

SKLERIJENN WAR VRO



PA 'm-eus kavet ar homzou hervez ma faltazi
Eo savet ebarz ma fenn ar c'hoant da gom-
[pozi ;
'N em lakaad a ran bremañ da gana va zonenn
Evid tremen ma zourmant, ma glahar, ma anken.

✦

Evid tremen ma zourmant, ma glahar, ma anken,
Diqes d'an oll Vretoned eun tammig sklêrijenn
Diwar-benn ar gouarnamant hag e oll bromesou,
Lavaret 'neus vije grêt barz ar vro fabrikou.

✦

E Brenniliz 'mer sevel bremañ eur mell fabrik
A ziskargo war ar mêz he fouldrenn atomik ;
Deuz honnez a zirollo war zouar Breiz-Izel,
Kredit mad 'ta Bretoned, eun devez ar brezel.

Dre Zant Rivoal, Brenniliz, Botmeur har ar Fouillez
E oant soñj lakaad eur hamp, ma n'eo ket eun
[druéz '
Eur hamp ledan da loja eur boblad soudarded,
Tenna ' raint o zamm bara digand ar beizanted.

✦

Ha c'hoaz 'meus klevet lared e parrez Bodilis
'Maint klask ober eur hamp all evid ar hirri-nij.
Goude ma 'z eo bet Bro-Frañs gand on tud di-
[fennet,
Peseurt anaoudegez vad a zo deom diskouezet '.

✦

Prenet '-neus er Hôtes d'Armor e parrez Tre-
[margat
Eun den euz Afrik-du-Nord seiz kant devez arad,
Prenet an douar labour e koste ar mene,
Ne jomo tamm douar mad warlerh ar baotred-se.

✦

Petra ' rim neuze amañ, labourerien douar ?
Gand eur pochenn euz on dorn mond da glask
[eun tamm bar '
Gand eur pochenn euz on dorn mond da glask
[or bruzenn,
Pounner kroaz ar Vretoned, kaled o flanedenn '.

✦

Deom oll 'ta da Vatignon pe c'hoaz d'an Elizé,
Sirom boutou Charlez Vraz, touzom baro Debré,
Rak ganto ni zo lakeet oll en displijadur,
Renet om gand eur vro fall, gand eur Frañs
[dinatur.

✦

Me o ped oll Vretoned da houlenn a bouez penn,
Evid savetei ar vro ma vo greet Eul LEZENN (1)
Araog ma vezo chachet an oll yaouankizou
Da voned da vizeri duze barz ar hêriou.

✦

Ho pedi ' ran da zoñjal o c'hwi oll va zud vad,
Er homzou savet, ganin e kreiz ma halonad.
Mar fell deoh kleved gand piou eo greet ar
[ganaouenn,
IF Ar PICHON eo anvet, Kervoaneg, Poul-
[laouen.

(1) Loi-Programme pour la Bretagne.